



CANTIC SPIRITUEL.

Var ton : *Sant Mathelin.*

Me ho suppli , tud devot , da chilaou er galon
 Eur C'hantic spirituel , gant guir devotion ,
 D'an Itron Maria Kernenan , e ra miraclou bras
 Er pevare c'horn d'eus ar hed ne gaver quet it far.

O Itron Maria Kernenan ! me sicour da lac'ho an tan ;
 Ebars parres Ploërdut , Escopti a Guenet ,

Batisset var eur menez. Jesus-Christ, an Tad eternel !
Deus a barres Bubry a voe croguet an tan en e dy.

Ha yon sail bar e fenest da grial : Itron Varia Kernenan.
Me sicour da lac'ho an tan ;

Me rai eun doneson er c'haëra d'an Itron Varia Kernenan.
Ar bed a so es da trompa, mes Doue ac ar sent ne dint ket,
Ne voa ket e goms peur achuet, an tan a so bet mouguet.

Ho draou pa voant guerzet heon ne goapet ar Verc'hez.
He draou tout à so bet poachet.

Deus a barres Riantec e oa bel roguet an tan bar vourg,
Hi commanç da grial : Itron Varia Kernenan !

Me sicour da lac'ho an tan ;

Ne voa ket e goms achuet, an tan a so bet mouguet .

Me gassa eun doneson da chapel ar Verc'hez .

Itron Varia Kernenan, me sicour da lac'ho an tan.

Deus a barres Plouai a voa croguet an tan bars en ty,

E chomas eur c'hrouadur bars creis an tan ;

He dad a gouestlas d'an Itron Varia Kernenan,

En eun instant an tan a so bet mouguet.

Meulomp oll, Christenien ,

Hor miracl so quen bras en deus gret ar Verc'hez :

Unan deus ho crouadur chomet creis an tan ;

Itron Varia Kernenan, me sicour da lac'ho an tan.

Deus a barres Gronal en eus ur miracl bras :

Itron Varia Kernenan , me sicour da lac'ho an tan ;
Deus a barres S. Tugdual a voa croguet an tan bar vourg.
O Itron Varia Kernenan ! me sicour lac'ho an tan.

Deus a barres Ploërdet a voa croguet an tan de vadou ;
Me rai an anter dious ma madou d'an Itron Varia Kernan.
O Itron Varia Kernenan ! me sicour lac'ho an tan.
Ne voa ket e goms achuet, an tan a so bet mouguet.

Deus a barres Sant Caradec -Tregomel ,
E oa bet croguet an tan en eur guer,
Hag hi commañç da grial : Itron Varia Kernenan ;
Ne oa ket e goms achuet, an tan a so bet mouguet.

Dre bermission ar Verc'hez Itron Varia Kernenan,
Me sicour da lac'ho an tan ;
Deus a barres Nial en eus eur miracl bras ;
En andret eur plac'h iaouanc e peden noz ha deiz.

Hag er batimant var mor e voa croguet an tan,
Hag hi commañç da crial : Itron Varia Kernenan,
Me sicour da lac'ho an tan.

Me gasso d'ei eur batimant d'an Itron Varia Kernenan ;
O Itron Varia Kernenan ! me sicour da lac'ho an tan.

An ol vartolodet a so bet salvet dre bermission ar Verc'hez
O Itron Varia Kernenan ! me sicour da lac'ho an tan.
Deus a barres Lomalo en eus eur miracl bras :
Voa bet crohuet an tan er guer, hag hi commañç da grial :
Itron Varia Kernenan ! me sicour da lac'ho an tan.

Ne voa ket e goms achuet, an tan a so bet mouguet.
O Itron Varia Kernenan ! me sicour da lac'ho an tan.
Capabl omp, christenien, da james anaout
Ar miraclou e ra an Itron Varia Kernenan.

Var mor ha var douar quement hag hi fedo,
Supplio e rai e mab Jesus da bardoni ar pec'het.
Ar sul var lerc'h gouel Maria-Creis-Eost,
E ma deis ar pardon an Itron Varia Kernenan.

Ouspén tri-c'huéc'h cant millionou amprivationnou
E ra an Itron Varia Kernenan var mor ha var douar,
Ha quement a gouel Maria durant er bla,
Hag an offiçou ar chapel santel-se.

O Itron Varia Kernenan ! me sicour da lac'ho an tan,
O Itron Varia Kernenan ! me o suppli hag o ped
Da squei an heur divesa d'imp var ar bed-ma,
Ne effemp da repos assambles gant ar sænt hag an ælez
ar barados.

JEAN-MARIE THOMAS,

Colporteur (Morbihan).

(PROPRIÉTÉ.)



E Guemper, moulet gard Ar. de KANGAL.